


bremañ

KROUIN LABOUR E BREIZH



GANT K.A.B. !

miz Here 1990 - niv. 109 - 15 lur



LIZHIRI

Kenvroiz ker,

Kas a ran deoc'h va adkoumanant da vBREMAN.

Ur gerig diwar-benn emglev sinet etre DIWAN hag ar stad.

Sur ez eo un trec'h a-bouez, met implijout ar ger "trec'h", a ziskouez ez eus un enebour e-tal deomp. Plegiet en deus ar stad dirak nerzhioù kevredigezhel ha politikel, met pal jakobined Paris n'en deus ket cheñchet : marv yezhoù minoreleziou Bro-C'hall.

D'am soñj ne vez ket pouezet a-walc'h war ar poent-se. Paet e vez 51,5 skolaer hep rakwel ebet evit stummañ ar re all. Sklaer eo e klask Jospin mirout ouz DIWAN da greskiñ c'hoazh, ha tamm-ha-tamm beuziñ klasoù DIWAN e meurvor an deskadurezh-stad.

Evel just e anavez tud DIWAN an traoù-se. Met ret eo sklerijennañ tud an diazev. An dud en dro din a gav dezho ez eo echu kudennoù DIWAN.

Ar pezh pouezusañ a c'hellomp merkañ ur wech c'hoazh eo ne blego ar stad nemet dirak an nerzh. Al labourerien-douar a zo o tiskouez kement-se deomp ur wech c'hoazh gant kudenñ priz ar c'hig.

Ur gerig ivez diwar-benn pennad SAB "Brezhoneg bemdez".

Evit kaout muioc'h a vrezhoneg war gwagennoù tele pe radio, ne servij da netra goulenñ kement-se d'ar chadennoù broadel. Ret eo, d'am soñj, implij memes doare eget DIWAN evit an deskadurezh. Tu 'zo da sevel chadennoù nevez, Radio ha Tele. Sur eo e vefe tu da gavout skoazell digant kuzulioù departamant, kuzul rannvro ...

A wir galon,
Youenn ROSMORDUC
SANT SEGAL

Ur blijadur zo bet din degemer ha lenn (pe arnodit) niverenn BREMAN miz Gwengolo. Gourc'hemennoù a gasan deoc'h evit ar gazetenn, hag ivez e koumanant dezhi, evit lenn e gazetenn vrezhonek bep miz, pe bep pemzektez, hag evit skoazellañ BREMAN. Buhez hir d'ar gazetenn vrezhonek !

Per POULIQUEN
MONTREUIL

Respont da evezhiadennoù Mark KERRAIN :

1) "Petra a vez graet er skolioù-noz hag en devezhioù-studi abaoe 40 vloaz ?" Mar bez greun o tiwan e talvez ez eus bet hadet greun. Difraostañ tachennoù, terrin douar hag hadañ greun eo a zo bet graet abaoe 40 vloaz.

2) "Daoust ha e talv da larout ne vez ket graet o labour gant ar gelennerien all ?" Ne ra ket. Bez e talvez, evit pezh a sell ouz an dud douet, ne vez ket graet ganto o micher eus al labour-se.

Gant va gwellañ gourc'hemennoù,
Paskal Ar Marc'hag
STUMDI

Objektouriezh

Emañ SKOL AN EMSAV Roazhon o klask un objektour evit miz Mae/Even 91, brezhonagar, barrek war an gompederezh, evit post leun-amzer objektour SKOL AN EMSAV 91-93.

Kas ul lizher hag ur C.V. da SKOL AN EMSAV, 8 straed Hoche 35000 ROAZHON, pe pellgomz d'ar 99 38 75 83.

Aotrou,

Goul a ran ganeoc'h m'ho peus un niverenn eus ho gazetenn BREMAN da gas din. Penaos e ra ar gazetenn evit stourm las da gwasked ar gouarnamant. Penaos e wellit an dazont evit Breizh ?

Abaoe 2 vloaz an gant Emgann. Labour mat zo graet ha memes hent 'heullhomp, hent an diubidigezh evit Breizh.

Trugarez deoc'h,

Richard LE BALER
BASTIA

Emañ KELAOUENN BREMAN o klask un darvez-kelaouenner(ez) hanter-amzer (dilaour dibaoe tri miz). Pellgomz da vurev Bremañ

99 38 75 83

GOUEL AR "VEUZE"

Evel bep bloaz setu ur chekenn evit ma adkoumanant da vBREMAN. Degast a ran da soñj da vignoned ar sonerezh hengounel e vo aozet d'an 13vet ha d'ar 14vet a viz Here TREDE

GOUEL AR "VEUZE". Goude bro ar gwiniegi hag ar palud "Breizhat-Vendea" e vo ar bloaz-mañ tro ar vromenn hag ar vro-zu, da lavarout eo Bro-Wenn-Rann ha geunioù ar Brière.

E Kerhinet nepell diouzh Gwenn-Rann e vo aozet ar gouel-mañ.

Setu ber-ha-berr ar pezh a vo graet e korf an daou zewezh-mañ :

Disadorn 13 : 10e. Dont a ralo izili Kevredigezh ar sonerien veuze da ziskouez o ampartiz war varc'hallach Gwenn-Rann. 15e. Kenstrivadeg Veuze deraouidi, Kenstrivadeg Biniou-Bombard. 21e. Fest-Noz (30 L.) e Asserac gant Baron-Annelix, Brou-Guilou-Guilard, Bardoul-Lahais. Ar sonerien veuze. E-pad ar fest-noz e vo ur c'henstrivadeg dañsoù eus ar vro.

Disul 14 : 10e30 e Breca (e-kichen Kerhinet) e vo diouellet ur maen e koun brudetañ soner veuze a zo bet e Brière a oa "Le Rouge de Breca" e anv. 15e Kenstrivadeg ar sonerien "ampart".

Evel just a-hed an daou zewezh-se e vo a bep seurt standoù (Dastum, sonerien veuze, Paluderien Wenn-Rann, ...). Tu 'vo ivez da zizolañ Kerladenn gKerhinet, bravañ hini ar vro.

DEUIT NIVERUS !

J.M. MAHE

MALLUS !

Klask zo war-lerc'h ur c'helenner (pe ur gelenner) brezhoneg evit Skolañ Kervoazan e Kemper, ha 2 eurvez all er Gelveneg, adalek ar 1añ a viz Here. Pellgomz da :

Izabel LEAL
12 plasenn an Ti-Kêr
29190 LOTEI
Pg. 98 73 36 54

Armerzh =

POSTAN ARCHANT = KROUIN LABOUR

Ar raktres "sevel e Breizh un c'hevredad dre gevrennoù", kinniget gant ar gevredigezh Kelc'hioù Arboellouriezh Breizh (K.A.B.), evit sevel embregerezhioù ha postoù-labour er vro, a sach'o hep mar evezh lennerien BREMAN.

Kenstrollet, greomp ar glaoistre : savomp postoù-labour e Breizh !

Piv a zo ac'hanoc'h ha petra a fell deoc'h ober ?

Tud o deus c'hoant ober traoù fets e Breizh hiziv, war an dachenn ekonomikel, a-benn rentañ servij da bobl Breizh. Kenstrollet omp e-barzh ar gevredigezh Kelc'hioù Arboellouriezh Breizh (K.A.B.), o vodañ kenwerzhourien, embregourien, kontacourien, implijidi ... pep hini barrek war e dachenn, prest da vont war-raok.

Abaoe bloavezhioù emañ Breizh o c'houzañv an dilabour, harlu ar re yaouankañ hag ar re ampartañ. Re alies e vez laketañ an arc'hant espernet war marc'hadoù etrevroadel, lec'h ma vez an ampletusañ war verr dermen.

* Sifr-etre ar goprou hag hini ar binvidigezh diabarzh (PIB) dre zen a zo izeloc'h e Breizh eget e Bro-C'hall (69 944 lur ha 85 400 lur).

* 31,9 % eus an arc'hant espernet a zo fiziet en tiez-bank (ha kefolu-espenn) gant tud Enez-Frañs (68,1 % gant peurrest ar Stad C'hall), met 47,2 % eus ar yalc'hadou a vez prestet dezho !

* A-benn 10 vloaz, un embregerezh war bevar en do cheñchet pann, pezh a c'hell bezañ arvarus ma n'eo ket aozet mat.

Ha koulskoude : abaoe 10 vloaz o deus ar Vretoned diskouezet e cant tud a ijin, leun a youl war an dachenn ekonomikel, sevenadurel ...

Evit-se hon eus c'hoant dont a-benn !

Peseurt raktres ho peus neuze ?

Sevel ur c'hevredad dre gevrennoù evit sevel embregerezhioù.



Diwar studiañ taol arnod an Euskariz (HERRIKOA), emaoomp o vont da sevel ur c'hevredad, 1 500 000 lur a gevala, ma vo e gefridi kemer perzh e kevala embregerezhioù emeur o krouiñ pe a zo krouet, evit sevel postoù labour.

N'eus ket tu, aes eo kompren, gwerzhañ kenloddennoù ur c'hevredad n'eus ket anezhi c'hoazh. Setu perak e kinnigomp deoc'h sinañ follennou-promesa evit prenañ a-benn bloaz ar c'henloddennoù (ha n'eo ket paeañ diouzhtu). Dindan bloavezh e ramp ar c'houzout gant ar promesaou, ha ma vez tizhet pal an 3000 kenlodden (500 lur priz pep hini), e vo poent paeañ da vat.

Laket e vo neuze reolenadur ar c'hevredad el lez-varn kenwerzh, ha gant emvod-meur ar genloddennerien a vo diennet ar c'huzul-ren. Hemañ a levio ar c'hevredad war-bouez merkañ ar postadurioù a vo d'ober, hervez ar barnverkoù siriuisted ha dierreusted azonet ganto kement raktres-embregerezh a vo kinniget dezhañ.

Setu penaos e teufot, c'hwil ivez, da vezañ kenberc'henn war ekonomiezh Breizh !

Un darn eus an arc'hant dastumet a vo miret, war kontoù tiez-bank diriski, met sur oc'h, pa ho po prenet kenloddennoù ur c'hevredad, e vo implijet hoc'h arc'hant evit sevel postoù-labour e Breizh.

Bep bloaz, war all bodad ar

genloddennerien, e c'hello ar c'hevredad kreskiñ e gevala, sevel kenloddennoù nevez. Posubl e vo (goude an daou vloavezh gentañ) gwerzhañ ho kenloddennoù : savet e vo un eskemm gant K.A.B. evit aesaat o gwerzhidigezh.

War all ar genloddennerien e c'hello ar c'hevredad paeañ ur c'hampi evit pep kenlodden.

N'eus bevven ebet evit prenañ an niver a genloddennoù ho peus c'hoant, met evit herzel ouz arvar ar souladpren, e vo bevvenet niver ar mouezhioù da 10 evit kement kenloddenner.

Peseurt embregerezhioù a vo prestet arc'hant dezho ?

Kement raktres embregañ a vo degemeret ganeomp, diouzh ma vo :

- sirius en o micher an embregour(ien),
- aozet mat ar raktres (gant un enklask ekonomikel, ur rakbudjed ...),
- savet, dre ret, postoù-labour e Breizh.

Kinniget ez eus bet deomp dija sevel un embregerezh dasparzh ar boued, un ti sevel-bier (evel COREFF e Montroulez), ur stal oc'h adimplij koad ar gwinielloù, ur greizenn oc'h ober war-dro an douristelezh sevenadurel ...

GWIRIOU AR VUGALE

Perak postañ arc'hant ?

War-bouez sinañ ur follenn-promesa evit prenañ kenlodennoù, e kemerit perzh en ur raktres bras evit krouiñ postoù-labour.

Setu penaos e welfot da betra e talvo hoc'h arboell ha c'hwil ganeoc'h en ho kerz ur galoud divizout.

Krouiñ ar binviji da reiñ an tu deoc'h pe d'ho pугale da labourat e Breizh, sed aze ar pezh a refo.

Re a arc'hant a zo bet kollet e Breizh evit traoù a zo aet da get warlerc'h : ar pezh a ginnigomp deoc'h hiriv a zo savet gant tud ampart, a venn prouñ e c'heller ober traoù fetis e Breizh evit savet postoù-labour gant mennoziou nevez, dre sevel un oberenn a hir dermen.

Ret eo d'erc'hel soñj e vo dastumet ar follenn-promesa e korf ur bloavezh ! Savet e vo ar c'hhevredad dre genlodennoù a-benn ar fan a viz genlodennoù 1991, d'an diwezhatañ. Reolennoù strik hon eus evit dont a-benn eus an oberenn-mañ : warlerc'h e vo re ziwezhat. Ha, ma chomfemp berr o kiask dastum promesaoù evit 3000 kenloden, ne vo ket eus ar c'hhevredad !

Diouzhtu eo ret mont war raok !

Goulnennit ar follenn-promesa ha kastit anezhi deomp en-dro bremañ. M'ho peus ur raktres sevel un embregerezh, kit e darampred ganeomp : degemeret mat e viot !

KELC'HOIU ARBOELLOURIEZH BREIZH (K.A.B.)
B.P. 90
29418 LANDERNE
Minitel 3614 CHEZ*KAB

Tangl MANACH Kadoriad K.A.B.

Notenn : kevredad dre gevrannoù = Société anonyme.

Lizher digor da gannaded Pobl Vreizh a-zivout Gwirioù ar Vugale hag ar gwallziforc'hañ yezhel er Stad C'hall.



Aotrou kannad,

D'ar merc'her 13 a viz Mezheven eo bet degemeret gant ar Bodad Broadel an danvez-lezenn o c'h aotren ar Stad C'hall da wiriekaat an Emglev Etrevroadel a-zivout Gwirioù ar Vugale.

Kinniget e oa an danvez-lezenn gant Kengor an Aferioù Estren, ha mouezhiet eo bet gant un diferdur-mirout ha daou ziskleriadur-desteriñ.

Evit an diferdur-mirout e oa savet a-zivout ar mellad 30 a zo kaoz ennañ eus "ar Stadoù ma 'z eus enno bihanniveroù kenel, relijiel, ha yezhel." Ur stad ar seurt-se eo ar Stad C'hall, ha c'hwil kannad breizhat, a oar mat ha deus pobl Vreizh hec'h istor, he sevenadur, he yezh.

Savet e oa an diferdur-se war zigarez e vez gwarantet, gant mellad 2 ar Vreizh C'hall, ar barded d'an holl dirak al lezenn "hep gwallziforc'herañ war an arin, ar ouenn, ar relijion".

Evit a weler, n'eus ket ebet a wallziforc'hañ an dud en abeg d'o yezh er Vreizh C'hall.

Nach votiñ an diferdur-mirout diwar-benn ar mellad 30 en dije roet tu da gas war-raok Gwirioù Mab-Den e Breizh, peogwir ne vez ket gwarantet ar barded dirak al lezenn d'an dud a ra gant ar brezhoneg e-barzh ar Vreizh C'hall.

Na pet gwech ez eus bet kondaonet krizoc'h tud o c'h ober gant ar brezhoneg eget re all gant ar galleg el leziou-barn gant !

Gwallziforc'hañ bugale abalamour d'ar brezhoneg a vez graet ivez gant ar Stad C'hall.

Nevez zo hon eus gwelot an Deskadurezh-Stad o nach reizhañ ha notenniñ an deverioù skrivet gant div grennardez en amodenn ar BEPC.

An diferdur-mirout ouz ar mellad 30 zo bet degemeret gant an danvez-lezenn. 561 mouezh diwar 564 mouezhier o deus roet aotre d'ar Stad C'hall da genderc'hel gant ar gwallziforc'hañ yezhel.

Setu perak e c'houlennomp diganeoc'h, Aotrou Kannad, c'hwil a zo bet dileuriet gant pobl Vreizh da zifenn he gwirioù ha re he bugale, lavarout dimp hag-er hoc'h eus votiñ, gant ar 561 a gannaded-se, an diferdur-mirout ouz ar mellad 30 a ro tu d'ar Stad da wallziforc'hañ hon bugale en abeg d'o yezh.

Da c'hortoz ho respont en ho pedomp, Aotrou Kannad, da zegemer hon gwellañ gourc'hemmennoù breizhek.

En anv S.A.B. Herve ar Gall

SKOLIOU DIVYEZHEK en Deskadurezh Stad

D'ar 15 a viz Gwengolo eo an em vodet e LANDERNE dilennid ar gevredigezh APEEB, amzer dezho da welout penaos e tremene an distro-skol.

Sed amañ ar sifroù e pep skol (SV = Skol Vamm, KD = Kentañ Derez, ED = Eil Derez) :

- KAWAN : 16 bugel (SV)
- LANNUON : 129 bugel (SV, KD, ED)
- LANDERNE : 24 bugel (SV, KD)
- PONDI : 35 bugel (SV, KD, ED)
- LANESTER : 67 bugel (SV, KD)
- ROSTREN : 48 bugel (SV, KD)
- ROAZHON : 80 bugel (KD, ED)
- SANT RIWOAL : 25 bugel (SV, KD)
- BREC'H : 31 bugel (SV, KD)
- TREGASTEL : 13 bugel (SV)
- DOUARNENEZ : 36 bugel (SV, KD)

Ur goulnenn evit ur c'hlas nevez a oa bet diskleriet er bloaz-mañ nemeten ha re ziwezhat evit ma vefe dalc'het kont anezhi evit ar bloaz. Daoust da se, e kresk niver ar vugale er skolioù divyezhek kement ha warlene, da lavarout eo e vo skoliataet ouzhpenn 500 krouadur er skolioù-se, ar pezh a ra ur c'hresk a 135 pe 37% ! Ar c'hresk-bras-se a dalvez e ra berzh ar skolioù : klokkaet e vez a-hed ar bloavezhioù an hantannoù digoret gant klasoù evit bugale dindan 6 bloaz, ha tri glas peurlvial er c'hentañ derez (CP, CE1-CE2, CM1-CM2), ha dreist-holl e vez dedennet kalz a vugale er c'hlasoù bihan.

Dindan daou vloaz eta eo bet daougemmet niver ar skolidi, ha ma kendalc'h en doare-se e vo tost da

ouzhpenn a zo ezhomm. Iskis a-walc'h e vefe krouet postoù divyezhek gant PARIZ, ha n'emañ ket an Enselerien e Breizh evit implij anezho abalamour d'an diouer a vistr.

Gwelat e vez ivez e chom direpsont an Deskadurezh-Stad e-kenver ar skolaerien-vale a zo ezhomm e PONS KORV (abaoe 4 bloaz e vez goulnennet ha roet kentelioù gant kerant), hag e Bro-Dreger. N'eo ket diabeg eta eo bet divizet pouezañ war stummadur ar vistr-skol a-kerz kendiviz an APEEB hag ar FLAREP e DOUARNENEZ d'ar 27-28 a viz Here.

En eil derez, e vez kendalc'het gant kentelioù brezhoneg hag e Brezhoneg (evit an istor hag an douaroniezh, an treserezh pe ar muski) e ROAZHON, e LANNUON, hag e PONDI (mat metra e KASTELLIN). E Liger Atlantel, goude ar manifestadeg dirak ar rektori d'ar Merc'her 13 a viz Gwengolo, e kinnig ar Rektor implij un M.A., ar pezh ne vo ket trawalc'h evit seveniñ ouzhpenn 500 skolidad bet kontet gant enklask bras an APEEB. Goulnenn e Bro-Naoned, ar pezh a vefe an doare gwellañ da wriziannañ kelennadurezh ar brezhoneg eno.

E dibenn an emvod eo bet votet gant an APEEB ur mennad o kinnig da zDIWAN ha da zDIHUN (war-lerc'h krouidigezh ar skolioù kristen divyezhek e GWENED hag e GISEN I) e kenlabourat evit astenn an divyezheg er vro ha dreist-holl war tachennoù 'zo evel stummadur ar skolaerien, sevel levrioù kelenn ha sevel ur gouel e Breizh evit ar vugale divyezhek.

A.P.E.E.B.
B.P. 2507
35025 ROAZHON CEDEX

10 000 bugeler skolioù divyezhek er bloavezh 2000. Ar pal-se a zo bet kinniget gant an Ao. MAER LANDERNE J.P. THOMIN, en ur zegemer izili an APEEB.

vugale e LANESTER gant 67 bugel war-lerc'h tri bloavezh-skol.

Ouzhpenn-se e c'heller merzout an niver bras a skolidi a vez e karioù 'zo mear a wech e c'hoarvez d'an danvez vrezhonegerien bezañ ar muiañ niver pe dost en o skol. Menegomp ivez berzh ar CP nevez e ROAZHON gant 16 bugel, ar skol-vamm e LANNUON gant ouzhpenn 30 krouadur, ha niver ar

Diskouez a ra ar sifroù-se e c'houlenn muioc'h-mui ar familhoù un deskadurezh divyezhek evit o bugale. Met n'emañ ket an Deskadurezh-Stad evit seveniñ d'o goulnenn en un doare klok e pep lec'h. Ma ez eus bet roet daou bost ouzhpenn gant ar Minister evit ar c'hlasoù divyezhek (unan e ROSTREN, egile e LANESTER), n'ouzer ket evit c'hoazh hag-er vo ur skolaer stummet evit kemer ur post eno, evel e LANDERNE ha DOUARNENEZ, evit ar postoù

BEP DAOU VIZ LENNIT

AL LANV

59 hent Kerdronioù Vihan
29000 Kemper

Koumanant bloaz : 100 lur
Skoazell adsek 130 lur

TI BOUTIN Breujoù Europa ar geodediz e Praha

E PRAHA, etre an 18 hag an 21 a viz Here a zeu e vo dalc'het ar c'hentañ "Breujoù Europa ar geodediz". Ganet eo bet ar menoz diwar "Galvadenn Praha" e 1985 graet gant meur a ezel eus skrid diazez 77 Tchekoslovakia (en o zouez Václav Havel) davet ar pevar emgav E.N.D. (European nuclear Disarmament) a oa dalc'het e Amsterdam gant emsavadurioù kevredigezhel an Izel Vroioù. Personnelezhioù hollvrudet a harp an intrudu-se, evel Václav HAVEL, Lech WALESA pe Joan BAEZ. Komiteoù oberant e darn vrasañ broioù Europa koulz er Stadoù Unanet hag e Kanada a zo ivez. Bez e c'hell "Breujoù ar Geodediz dont da vezañ ul lech dibar evit startaat ha donaat an demokratelezh en Europa hag ul louzoù enep riski ar c'hiladennou gouennelour", eme an Ao. DREANO a ra war-dro ar c'homite e Frañs.

Lakaat da dalvezout emglevioù Helsinki

Anat eo ez eo cheñchet penn-da-benn doareoù ar raktres-se gant larv an demokratelezh e stadoù kreiz ha reter-Europa. Er Stad C'hall e oa ur c'homite bihan e darempred gant ur rouedad etrevroadel. Emañ o soñj dont da vezañ digor bras d'an emsaviou arakour ha d'an intrudoù kevredigezhel. Tro en deus bet da bleustriñ dija war danvez braujoù Praha: ar gevredigezh sivil, an demokratelezh hag unvanidigezh Europa, gwir ar minorelezhioù, ar stourm a-enep ar ouennelouriezh hag an aon rak an estrenien, ar peoc'h hag ar surentez, an ekonomiezh hag an ekologiezh.

Fellout a ra da diazerien ar c'halvadenn "seval ur gevredigezh dezhi sevenadurioù liesseurt digor war broioù ar c'hreisteiz, gant gwirioù leun evit an holl dud o vevañ enni, repudi, divroldi, pobloù gmiidik. Ur gumuniezh o toujañ da wirioù an hiniennou ha d'an emveañ, gwirioù ar marc'had, ar gwirioù kevredigezhel ha sindikadel koulz ha reoù ar minorelezhioù o toujañ d'an diforc'hioù sevenadurel, revel hag all."

"Hor pal", emezo, "eo unvaniezh Europa en he disteñvelidurioù".

Pedet eo ar re a zo a-du gant plioù an disklariadur da gemer perzh e Breujoù Praha. Hep mar e vo heuliet a dost an disoc'hioù gant kalz a dud an un doare ispisial e Breizh hag er broioù bihan.

T.L.



Galvadenn Praha a ginnige d'an hiniennou, d'ar strolladoù hag emsaviou dishual ha demokratek, kendivizout en Europa a-bezh war diazez ar framm savet gant emglevioù Helsinki e 1975.

hag a oa sellet evel perzh "keodediz an diaz" el labour startaat ar peoc'h.

Gant an trec'h kentañ-se eo deuet ar soñj d'ar re o doa savet galvadenn Praha da lakaat war ar sterm ur gwir "parlament an diaz", ur seurt forom dihan en diavaez ar gouarnamantoù a c'helle ober goulennoù pe kinnigoù d'ar stadoù o deus sinet emglevioù Helsinki. Perzh tud ar gevredigezh voutin a vefe e-giz-se gwarant an demokratelezh.

E 1989 eo e vo savet an anv a "Breujoù Europa ar Geodediz" ha dibabet Praha da lech kenvodan.

PENNEROU AR RETER KOMUNOUR

Ne ra ket diouer ar c'haleier o tont eus Stadoù ar Reter, stadoù a zo krog da dreiñ kein, an eil war-lerc'h eben, d'ar varkegezh hervez Sant Lenin. En ur welout kement a zeliennou kaset d'an trañ, kement a vannioù toulet, ez eus peadra da grediñ e oa bet rediet ar pobloù-se da azeuliñ sent ar gomunourien, buket ma oa warno kanolioù al lu ruz. Ha koulzskoude, er pennerou, ne astenne ket ar soviedourien o c'hrabanou war douaroù enebour d'o levezon na tost. Deut int d'her bezañ diwezhatoc'h. Krouidigezh an demokratelezhioù poblet er reter na voe sellet outi er bed korropour nemet pennoù bras Moskou, bezet ma oad en aergelc'h ar brezel yen, fromet ma oad adalek ar bloavezhioù hanter kant, gant emsavadegoù kentañ broioù ar reter evit klask teurel yev ar soviedourien diwar o zal. Hervez Jean-François Soulet, kelenner war an istor a skol-veur Tolza, ne vefe ket tu gant un hevelep emzoug, da zieleñnañ mat orin an trec'h komunour e bladoù ar reter goude an eil brezel bed. Har displegañ a rae en niverenn 62 eus ar gelaouenn L'HISTOIRE (Miz Kerzu 1983) arak daneveilliñ an darvoudoù a voe savet d'o haul ar reter komunour.

eus an dilennerien adalek miz Eost 1919, ar vicherourien da ziskregiñ meur a wech dlozh o labour e-kerz diskar-amzer 1919, en ur en em harpañ war ar sindikadoù, hep dont a-benn koulzskoude da vountañ ar bobl war-du an dispac'h".

Daoust ma chomas barr ar gomunourien-se da dizhout o falioù, e tiskouezas an darvoudoù-se pegen broioù er mare-se, broioù a oa dareis ar prezegennoù n'eus torzh peseurt dispac'h, gant ar reuzeudik ma oa o stad. Entanet e oa neuze ar yoaunkizoù gant an ideologiezh komunour, un ideologiezh a c'houlenne diganto kenstrivañ evit hevoud maden.



"N'eo ket dre zegouezh, e kaved e 1924, tri eus pevar strollad komunour brasañ hor rannved (hep hini URSS) e broioù ar reter: SK ALAMAGN (350 000 ezel, 0,53% eus ar boblañs), SK Alamagn, evit sevel ur strollad komunour. E-kerz ar bloavezh 1919 en em stummas strolladoù komunour e Slovakia, e Roumania hag e Tchekoslovakia. En Albania ne voe ket eus un hevelep strollad arak 1930".

"Diouzhtu goude, e klaskas emsaverien ar strolladoù nevez mont war seuloù dispac'herien Rusia, kemer penn an traoù en o bro: da gentañ en Alamagn (miz Du 1918-miz Meurzh 1919) goude-se en Hungaria a voe nemet enni "Republik Hungaria ar C'huzulioù" gant Bela KUN hag e gamaladed, eus ar 21 a viz Meurzh d'ar c'hentañ a viz Eost. Atizet gant o amezelien, e voe tro komunourien Slovakia da sevel o "Republik ar C'huzulioù" dezho. E Bulgaria, e vroudas ar Strollad Komunour, ur strollad a voté evitañ 20%

gouarnamant harluet e Londrez. Gwir eo e vage ar boloniz kasoni ouzher ar soviedourien pa oant bet preizhet ganto etre miz Du 1939 ha miz Even 1941. Disheñvel e voe an traoù e Slovakia, e Yougoslavia hag en Albania lech en em savas ar Pobloù ouzher an alouberien diwar atiz ar strolladoù Komunour.

Ne voe ket fiziet tonkad ar Reter e Stalin e Yalta evel ma vez lavaret alies, met e Moskou, etre an 9 hag an 18 a viz Here, gant un emglev etrezañ ha Churchill. Divizet e voe gant piv ez ale Roumania, Gres, Yougoslavia, Hungaria ha Bulgaria. Dilazet e oa bet dija Tchekoslovakia etre krabanou mistri ar C'hremlin diwar intrudu Benés. Pleget o doa ar Vreizheuzer da varc'hata gant ar soviedourien a-benn astenn o levezon war C'hres, ur vro a-bouez e politikerezh ar rouantelezh unanet e Mor Kreizdouarel. Ar soviedourien a zalchas d'o ger. Ne finjont ket pa darzhas ar Brezel etre SK Gres ha gouarnamant Aien.

Degemeret e voe soudarded al Lu Ruz evel dieuberien er Reter. O vezañ ma oa ar gomunourien e barr o brud pa voe pilet an naziourien, ne voe ket start dezho kaout ur mennad er broioù-se. Re laouen e oa o fobloù o vezañ bet dijabet diouz kaddon Hitler evit kompren e oa o renierien nevez, merc'hodennou Stalin. Toulet eo voest en o gad. Keflazañ a rae Tito miliadoù a ensaberien e-keit ha ma nagennet gwidreuz er broioù all enep an tuadoù nannkomunour. N'o doe ket ezhomm peurliesañ ar soviedourien da reiñ skod d' o mevelien da seveniñ o cheñchid, krahv a-walc'h e oant neuze evit kas o zaol da vat hepito.

Paul Ar Meur

ADKOUMANANTIT DA V-

breman

150 lur ar bloaz



FR3 BZH : hag a nevez ?

Kuzul Rannvro : bep Gwener da 12e40, vo kinniget "Gros Plan sur la Bretagne" "Ur sell ouzh Breizh". Paeroniet gant ar C'huzul Rannvro. Keleier diwar-benn "oberannoù ha teuliadoù bras ar C'huzul Rannvro".

Top à l'Ouest : sizhuniek e vo an abaden-se ar bloaz-mañ. Kinniget e vo bep Meurzh goude keleier noz FR3 Gall : "Soir 3".

"Pa vo bezuet Pariz ec'h adsavo Kêr Is"

Cheñchamantoù a vo ar bloaz-mañ evit an abadennoù e brezhoneg.

Bremañ ez eus keleier bemdez e brezhoneg. Lod a lavar n'eo ket ken aes da sellout ouzh ar c'heleier da greisteiz. Gwir eo. N'hallin ket sellout outo kennebeut. Met n'eo ket peogwir n'hallin ket ME sellout outo eo un eur fall. Keleier Kreisteiz a zo sellet kalz gant an dud. Petra 'zo gwelloc'h : keleier brezhonek

heuliet nemet gant tud o kemer un emgav ganto pe gant tud ar vro ? Lod eus outo brezhonegerien. Gwelloc'h eo ma vefe sellet gant ar mutañ posubl a dud, emezon.

N'eo ket brasat lodenn ar brezhoneg en tele abaoe bloavezhioù. Aze 'mañ an dalc'h ! Perak ne vefe ket kinniget 5 mn a bloaz abaoe 6 bloaz. Yalc'hadou all a vo roet gant Kuzul Jeneral Penn ar Bed. Ma ne vefe ket yalc'had ar Rannvro, ne vefe ket mui a abadennoù brezhonek, a anavez J.P. Guguen, Rener FR3 Breizh-B.A.L. (D.E.A. Yves LAINE "Communication et Culture : des mass-media à l'Édition, quel avenir pour la Langue Bretonne ?") : "Vous dire que je me satisfais de la situation vis-à-vis de

Yalc'hadou a vez roet gant ar C'huzul Rannvro evit ma vefe abadennoù brezhonek. Etre 700 ha 750 000 L. bep bloaz abaoe 6 bloaz. Yalc'hadou all a vo roet gant Kuzul Jeneral Penn ar Bed. Ma ne vefe ket yalc'had ar Rannvro, ne vefe ket mui a abadennoù brezhonek, a anavez J.P. Guguen, Rener FR3 Breizh-B.A.L. (D.E.A. Yves LAINE "Communication et Culture : des mass-media à l'Édition, quel avenir pour la Langue Bretonne ?") : "Vous dire que je me satisfais de la situation vis-à-vis de

Kinniget eo bet roll abadennoù FR3 Breizh evit 90-91, e dibenn miz Gwengolo.

Brezhoneg

KELEIER : 5 mn a geleier e brezhoneg a vo bemdez bremañ eus al Lun betek ar Gwener da 12e06 arak ar c'heleier e galleg. Ha n'eo ket eus al Lun betek ar Merc'her evel ma oa bet skrivet gant O.F. d'ar 26-09-90. Savet e vo an abadennoù-mañ gant skipailh Fañch Broudig e Brest. Ur skoazell archant en do FR3 Breizh evit en ober, digant Kuzul Jeneral Penn ar Bed. Skignet e vo ar c'heleier-mañ eus Brest war "4 departamant ar Rannvro", ha n'eo ket war Breizh Izel nemetken e giz e oa bet laret e kendivz Sellat ha Klevet Penn ar Bed, dalc'het d'ar 24 a viz Eost e Douarnenez.

CHADENN AR VRO : Skignet e vez Chadenn ar Vro war Dac'henn FR3 Breizh ha Broioù al Liger a-bezh bep Sadorn etre 13e ha 14e. Kemer a ra plas abaden Keleier "An Taol Lagad" a oa bet skignet bep Sadorn warlene. Brezhoneg ken d'ar Sul ouzh an tele neuze. Kavet e vo ar bloaz-mañ ar memes abadennoù, da laret eo, Skrid ha Sonerezh, Meleziour Breizh, filmoù, tresadennoù-bev (an Enseller Gadjet ar bloaz-mañ), Dremmwel ar Gallet (gant Bro-Gembre ouzhpenn) ...

Galleg

Bep Sul da 12e05 e-pad 15mn, e vo kinniget darvoudoù pouezhus ar sizhun. Tair gazetenn a vo savet : unan e Roazhon, unan all e Naoned, hag unan all e Le Mans.

Adalek an 22 a viz Here e vo savet un abaden kelaoññ lec'hel evit Naoned ha Sant Nazer. Ne vo ket ken penn kentañ an 19/20 en Naoned hag e Sant Nazer. Da laret eo penn kentañ Keleier Gall FR3 a vo kilet.



Stourm Ar Brezhones

la langue bretonne, non. Vous dire que ça me fait plaisir d'aller demander au président du Conseil Régional une subvention pour améliorer les choses (...), non. Est-ce que le rôle d'un service public est d'aller à la quête pour le maintien d'un acquis culturel comme celui de la langue bretonne, non. Mais je suis contraint de le faire".

"Pa vo bezuet Pariz e adsavo Kêr Is". Da laret eo Pariz a ziviz. Diwan a oar re vat an dra-se ! Gwir eo ivez evit FR3. Abeg brasañ eo evit an nebeud a bias graet d'ar brezhoneg. N'eo ket o tagañ renezh FR3 Breizh e vo cheñchet an traoù. Petra a ra politikourien Breizh 'zo ?

Met goullenn muioc'h a abadennoù brezhonek n'eo ket a-walc'h. Petra a fell deomp kaout ? Abadennoù dreist pe vrein ? Ne varnin ket amañ an abadennoù a vez savet. An holl re a sell outo a oar mat petra soñjal. (Adlennit pennad bremañ Niv. 101, miz C'hwevrer 90 : "Dexter Nullig Kernoa" da skouer). Gwellaat ar pezh a vez graet hiziv a zo an dra gentañ da c'houllenn.

Un trec'h zo bet gant an emglev a oa bet sinet etre Diwan hag an Deskadurezh stad d'an 28 a viz Gouere dwezhañ. Met arak e oa bet graet kalz a labour : digeriñ skolioù, stummañ tud ha. En ur ger : OBER. An dra-se a vo ret deomp kas war-raok, ni emsaverien, ma fell deomp kaout muioc'h a vrezhoneg en tele. Ober abadennoù video. Da laret eo stummañ tud war an teknik, war ar c'horiva-tele, gwerzhañ ar filmoù-se goude.

Bec'h dehi Europa !

Evit echuiñ : graet ez eus bet "ur soubenn" gant lizher ur plach sot, emezon, a oa bet embannet gant O.F. teir sizhun 'zo. Ar plach-se a blij dezhi kalz ar sonerezh klasek. Gwel a se. N'halle ket ar paour-kaezh maouez sellout ouzh an abaden "Musicales" skignet gant FR3 gall d'ar Sul da vare Chadenn ar Vro. Goullenn a rae ma vefe cheñchet eurvezhioù an abadennoù brezhonek. Ouzhpenn-se ne gomprens ket perak e vefe c'hoazh Brezhoneg da vare "Europa o sevel" ...

Perak ne c'houllentemp ket "Musicales" e brezhoneg pe e saoneg, n'eus ket ezhomm eus ar galleg ken da vare Europa !

Da geñver lidoù Priz Europa e PLOUGERNE, ez eus bet un emwal etre Burev STOURM AR BREZHONEG ha pevar den eus KUZUL EUROPA, (an AoAo, JUNG, senedour eus Bro Elzas, NEWALL, lord saoz, ZIERER, senedour alaman ha LARCHER, kargiad).

Displeget ez eus bet dezho gant dileurdi STOURM AR BREZHONEG emañ ar brezhoneg en arvar abalamour d'ar bolitikezh a yezhzhadeg savet gant ar Stad C'hall, daoust da erbedadennoù KUZUL EUROPA war ar

poent-se, dreist-holl en niverenn 192, (1988). Goullennet ez eus diganto pouezañ evit ma poueazfe gant ar politikerezh-se, ha ma ve doujet da wiroù ar Brezhoneg e Breizh.

Gant aked o deus selaspuet arguzennoù STOURM AR BREZHONEG, hag embannet o deus kannaded KUZUL EUROPA o youl da strivañ evit ma ve laketa da dalvezout o erbedadennoù gant ar Stad C'hall.

S.A.B.
21 Straed al Lezioù-Barn
56000 GWENED



emvod S.A.B/kuzul Europa PLOUGERNE 23.09.90.

Stourm ar Brezhoneg a sav e voutezh a-enep diviz ar gouarnamant saoz da baouez gant e skoazell archant d'ar skolioù iwerzhonek e Béal Feirste. Diskouez a ra an dagadenn nevez-mañ a-enep an iwerzhoneg petra eo politikerezh ar Saozon en Hanternoz Iwerzhon e gwirionez, ha pegen lu eo o diskleriadurioù diwar-benn "o doujañ ouzh an daou hengoun sevenadurel" eno.

Diskleriañ a reomp hor c'henskoazell d'ar skolaerien iwerzhonek zo bet dic'hoprat ha d'ar familhoù eo bet lennet o skolioù iwerzhonek diganto. Ha goullenn a reomp gant digant ar gouarnamant saoz reiñ en-dro e skoaziadennoù archant da skolioù iwerzhonek Béal Feirste.

Kemmet ha krennaet eo bet amzar-skignañ abadennoù brezhonek FR3 ur wech ouzhpenn, hep lavaret re mañ arvesterien. Penaos e cheñch ar re mañ kavout abadennoù en o yezh ma vezont diblaset dibaouez war urzh Pariz ?

Lavarout a reer deomp e vo skignet 5 munud a geleier bemdez, da greisteiz. An holl a oar, ha tud FR3 da gentañ penn, ne vez koulz lavaret den ebet o sellet ouzh ar skirwel d'ar mare-se. Ober goap a ra FR3, ur wech ouzhpenn, eus miliadoù a vrezhonegerien, och ober van da blegañ dirak hor goullenoù. Hogen Stourm ar Brezhoneg ne vo ket laketa da deval gant bruzhunoù. Ar pezh a fell deomp da gentañ eo abadennoù brezhonek bemdez da euriou mat, ha da eil ur chadenn vrezhonek o skignañ war Breizh a-bezh.

"HENT AR MEURVEIN"



Asantet e oa bet gant dileuridi eus kelc'h Sten Kidna an Alre, Kelc'h Sevenadurel Gwened, Emglev Bro an Oriant, Karget e oa ar Greizenn Enklask war an Anvioù-lec'h hag ar Panelloù-henchañ, ar bodad-labour krouet e 1988 e (framm Skol-Uhel) ar Vro, da genuzhiañ al labour treñn ha da ginnig frouezh ar c'hlenlabour da Gengor an Douristelez.

Adalek miz genver 1990 betek kreiz miz Ebrel ez eus bet roet lañs d'al labour treñn gant ar Greizenn Enklask. Meur a lankad a oa gant al labour-mañ : reiñ ur stumm brezhonek a-vremañ d'an anvioù-lec'h, kavout ha dibab ar gerioù skiantel a oa ezhomm war dachenn an hendraouriezh, treiñ an destenn hec'h-unan. Evit a sell ouzh an anvioù-lec'h e oa bet graet diouzh reolennoù labour boas ar Greizenn enklask : enklask war distegadurioù an anvioù ar vro hag ar stummoù rannyezhel. Disheñvel e oa an traoù evit geriaoueg an hendraouriezh. Skiant-vaot eo lavaret e vo troet "sépulture mégalithique coudeée" pe "sépulture à chambre compartimentée" er memes doare forzh pelec'h e velet e Breizh. Un droidigezh hepenk eta hag unan ken resis ha splann hag e n'eus forzh peseurt yezh all. An destenn a oa bet troet gant ur yezh resis ha modern, anat warni liv ar gwenedeg.

Setu 'ta evit ar pezh a sell ouzh an devoas asantet aozañ emvodoù gant kevredigezhioù sevenadurel an departamant ha dileuridi eus ar Greizenn Enklask war an Anvioù-lec'h hag ar Panelloù-henchañ eus Skol-Uhel ar Vro. Pevar emvod a oa bet e-kerz 1989 (hini ebet e 1990 ...) evit studiañ peseurt lec'h a vije tu da reiñ d'ar brezhoneg war ar panelloù. Distar-kenañ e oa bet disoc'h an emvodoù-mañ. Kinniget e oa bet staliañ panelloù o verkañ peur e yeer tre e bro-mañ-bro war an hent a ya eus an Oriant da Benn-ar-Bed, war-zu Rosko. Un dra all a oa bet kinniget gant Kengor an Douristelez. Bloavezh an Handraouriezh e oa 1990 er C'hwechhog. Er Mor-Bihan e oa bet divizet lakaat ar pouez war ar meurvein, evel just. Panelloù kaer (ha ker) a oa da vezañ staliet eta en un daou-ugent lec'henn bennak. Teiryezhak e oa da vezañ testenn ar panelloù-mañ ar penn kentañ : galleg, saozneg, alamaneg. E-doug ar vodadeg ziwec'h a oa bet e Ti an Departamant e oa bet kinniget lakaat brezhoneg ouzhpenn, gant Kengor an Douristelez.

Da heul labour Emglev Bro an Oriant, pennoù an departamant o devoas asantet aozañ emvodoù gant kevredigezhioù sevenadurel an departamant ha dileuridi eus ar Greizenn Enklask war an Anvioù-lec'h hag ar Panelloù-henchañ eus Skol-Uhel ar Vro. Pevar emvod a oa bet e-kerz 1989 (hini ebet e 1990 ...) evit studiañ peseurt lec'h a vije tu da reiñ d'ar brezhoneg war ar panelloù. Distar-kenañ e oa bet disoc'h an emvodoù-mañ. Kinniget e oa bet staliañ panelloù o verkañ peur e yeer tre e bro-mañ-bro war an hent a ya eus an Oriant da Benn-ar-Bed, war-zu Rosko. Un dra all a oa bet kinniget gant Kengor an Douristelez. Bloavezh an Handraouriezh e oa 1990 er C'hwechhog. Er Mor-Bihan e oa bet divizet lakaat ar pouez war ar meurvein, evel just. Panelloù kaer (ha ker) a oa da vezañ staliet eta en un daou-ugent lec'henn bennak. Teiryezhak e oa da vezañ testenn ar panelloù-mañ ar penn kentañ : galleg, saozneg, alamaneg. E-doug ar vodadeg ziwec'h a oa bet e Ti an Departamant e oa bet kinniget lakaat brezhoneg ouzhpenn, gant Kengor an Douristelez.

Da heul kement-mañ e oa bet eskemmou lizhiri niverus, titour ha kinnigadenn pe evezhiadenn a oa an em gavet e sekretourva Skol-Uhel ar Vro e oa bet dalc'het kont gant ar sekretouriezh. Savet e oa bet taolennoù ha teulldoù-kendastum a oa bet kaset d'o zro da gement hini an devoas

Ur gwalldaol war hent ar brezhonekaat.

Krog eur da welet un nebeud panelloù brezhonek war vord an hentoù. Goude Aodou-an-Arvor, departamant Penn-ar-Bed a zo o vont en ivez da lakaat staliañ panelloù-hentañ brezhonek war an hentoù-departamant. Ha trede departamant Goueled Breizh ?, emit-hu.

Nac'hañ krenn heuliañ skwer ar brezhonekaat a ra pennadurezhioù ar Mor-Bihan. "He zafjerus e vefe evit ar blienierien", ha "ne zegasfe netra d'ar brezhoneg ..." (na jentil ar c'hallegerien-mañ a oar petra a raio vad d'hor yezh ...). Un diskan anavezet. Sed aze tud n'o deus ket komprenet c'hoazh ez omp staget gant al luskad brezhonekaat a zaskor he c'hefidi yezh-darempred ha yezh-kelaoñ d'ar brezhoneg, yezh ur gevredigezh arnevez vev, e berr gomzoù, ha n'eo ket hepenk "ur binvidigezh sevenadurel da vezañ miret" da zedennañ touristid war glask ur meudad ekotegezh.

TOUELLEREZH

diskouezet bezañ prest da labourat. Da 10 den e oa bet kaset an destenn glok da vezañ troet.

Daniel DOUJET, en devoa neuze kinniget un droidigezh klok eus an destenn da dreñn. Mat e oa bet kavet gant izili ar Greizenn ha kemeret da ziaze. Ne choma nemet divizout da vat gant pasart termenoù skiantel e vije graet ha dibab ar stumm da reiñ d'an anvioù-lec'hiennoù.

Da echuñ ganti e oa bet lakaat al labour-mañ war roll-labour bodadeg ar Greizenn-Enklask d'ar Sadorn 7 a viz Ebrel.

ginniget int evel tud kaset gant ar Greizenn Enklask ha war zigarez difaziñ un nebeud traoù ez eo set an destenn a oa bet prientet gant ar Greizenn ganto. En em lakaat int neuze da adkompenn an destenn hervez o stultenn. Kemmet o deus ar gerioù skiantel, stumm an anvioù-lec'h ha betek an doare-skrivañ ! Evit tud Kengor an Douristelez ne oa netra souezhus en afer. Ha forzh penaos, gant ma vefe brezhoneg war ar panelloù, n'eus forzh pe mat pe fall, pe skrivet er saizhvat doare-skrivañ warn-ugent implijet gant daou zen e vefe, ne dalveza ket ur belgomzadenn da sekretourva Skol-Uhel ar Vro.

eta, war an droidigezh a oa bet kaset gant ar Greizenn Enklask. Hini Hent-korriganed Kergonfalz an hini oa.

Meur a dra a c'heller rebech d'an destenn a c'heller lenn war ar panelloù hag an holl anezho a gaver war banell Kergonfalz.

Testenn da dreñn :

Allée couverte de kergonfalz. M.H. Commune de Bignan. Monument long de 9,50 mètres et large d'1,50 mètre. Trois dalles de couverture subsistent, ainsi que douze piliers. Son entrée est située au Sud. Construction vers -3000, -2500 avant notre ère ? De l'autre côté de la route départementale, un grand tumulus recouvre un autre monument mégalithique très dégradé dont il ne reste que la chambre rectangulaire couverte d'une grande dalle. Il a été rapproché des dolmens coudeés du littoral, en raison de l'angle que fait la chambre avec son couloir d'accès. Ce monument, longtemps appelé le "Trou des Chouans", n'est pas accessible au public.

ALIGNEMENTS DE KERZERHO

Commune d'Erdeven

ALIGNEMENTS DE KERZERHO

STUDDENNOU KERZERHO

Estroget izili ar Greizenn Enklask e oa pedet re gevredigezhioù sevenadurel ar Mor-Bihan. Burutallet e oa bet ar c'heriaoueg skiantel, termen-ha-termen, ha stumm an anvioù-lec'hiennoù ivez. Goude un emvod hir ha labourus e oa bet echuet an dibab.

Ur sizhun war-lerc'h e oa kaset an droidigezh peulpet da servioù Kengor an Douristelez departamant Mor-Bihan. Echu e oa ar pezh a oa bet un doare "marathon" ha laouen e oa na dud o soñjal e vije brezhoneg mat war un toullad mat a banelloù nevez.

Siwazh ne oa ket echu an afer. O kregin e oa kentoc'h ... Pa soñje d'an holl e oa renket pep tra, ez eus aet tri den da welet an hini a oa e karg eus Hent ar Meurvein e Kengor Departamant an Douristelez. En em

N'eo ket frouezh meur a viz a genlabour a c'hellit gwelet war ar panelloù zo bet staliet eta. Labour tri den an hini eo, tri den o deus touellet servioù an Departamant ha graet feva war an holl re o devoa kemeret perzh el labour treñn.

Ha talvezout a ra ar boan brudañ kement an afer-mañ ? Hag e ra, evit meur a abeg. Da gentañ ne c'heller ket asantiñ e vefe diskaret evel-se, ken sioul ha tra, ar stivoù a vez graet evit kenurzhiañ al labourioù war ar yezh, diskar kaset da bann gant doareoù trubard, war ar marc'had. Da eil, siwazh, e vefe ur pezh studiadenn da skrivañ war labour an tri den. Evit ma c'hallfe ober o soñj hoc'h unan e vo kinniget deoc'h an destenn a zeue da gentañ, hep dibab

Troidigezh kaset gant ar Greizenn Enklask da gouristelezh :

HENT-KORRIGANED KERGONFALZ

Kumun Begnen

Savadur 9,50m a hirder dezhañ hag 1,50m a ledadenn. Teir liarc'h-to a chom ha daouzek peul.

Doch ar c'hreisteiz emañ durc'haet an antre.

Savet ar-dro 3000, 2500 vlez a-raok hon amzevrezh ?

En tu 'rall d'an hent departamantel, goloet gant ur grugell, e kaver ur savadur meurvein arall, aet e stad da fall bras ha ne chom anezhañ nemet ur gambre skouergetek toet get ul liac'h vras.

Lakaet eo bet e kamm get taolou-maen kamm an arvor, en arbenn d'ar c'horn treset get ar gambr anezhañ a gas dezhi.

Ar savadur-mañ, graet anezhañ e-pad pell "Trou ar Chouaned" a zo bremañ sarret d'an dud.

bremañ

An destenn vrezhonek a zo war ar banell :

TREPASS-KORRIGANED KERGONFALZ

Kumun Begnen Monumant a 9,50 metr a hider hag a 1,50 metr a zigored dehoñ. Tri maen-golo ha 12 peul a gom c'hoazh. Doch ar c'hreisteiz emae dirhaet toull an nor. Savet er blioù 3000 - 2500 e-raog J.K. ? En tu rall d'an hent-pras e kaver ur pikol krugell e c'hloñv un dolmen meini-meur arall e fall stad. Ne chom anehoñ namaed ur gamp reizhkogn, arnehi ur maen-golo bras. Hañval eo doc'h dolmenoù kamm an Arvor, a-gaos mand eo bet savet a-viaes ar gamp e penn an trepass. Ar monumant-mañ, gwraet "Toull ar C'hoazh" anehoñ e-pad pell, zo bremañ serret d'an dud.

Diresis eo ar yezh. "Digored" n'eo ket "Ledander" ha "maen-golo" ne dalvez ket "Iac'h-to". An "hent-pras" a c'hell bezañ n'eus forzh peseurt hent brasoc'h eget an hent bihan a zo en e gichen. Merkañ ez eo an departamant a zo e karg eus an hent a zo ret.

Ha gwenedekoc'h eo an destenn c'henchet ? "Hent-korriganed" a oa aas da gompen evit an holl e Bro-Wened. "Trepas-korriganed" avañ... Ne hañval ket ar ger "trepas" bezañ gwall anavezet er vro.

Bezañ komprenet gant tud ar vro, setu a oa c'hoant brasañ an tri den o deus kemmet an destenn. Ober gant stummoù isrannyezhel a reont eta, hogen n'eo ket ar re a vez graet ganto ar vro n'emañ ar banell ! Ur skouer hepken : en destenn e kaver ar stumm "a-viaes" a zo ur stumm isrannyezhel eus ar gevred pellañ diouzh tu an arvor. Hent-korriganed Kergonfalz a zo war barez Begnen hag eno e vo klevet [a'v'e's], a-vaez eta. Peseurt gouind a zo o-c'h ober gant seurt yezh ?

War un dachenn all c'hoazh eo diboañ an dibaboù zo bet graet, diboañ ha direizh. A "dolmenoù kamm an Arvor" e komzet an destenn. Taolvaen eo ar ger brezhonek reizh hag a-unvouezh e oa bet erbetat e impli gant ar re o devoa kemeret perzh el labour stroll. Ma vez lennet "dolmenoù" war ar

panelloù e vo lennet "menhroù" kenkoulz all a soñj-t'chiwi. N'emaoc'h ket ganti ! Gant "mein-hir" e vez graet. Peseurt poell a zo en dibabou-mañ ?

Setu 'ta ar pezh a c'heller lavaret diwar-benn ur banell. 36 panell a chom...

Ur gerig all memestra diwar-benn an anvioù kumunioù. Graet ez eus bet ur meskaj iskis etre doare-skrivañ kozh ar gwenedeg hag ar skrivadur emañvet "strerannyezhel". Setu disoc'h al labour : "An Arhor" (An Arzhon) ; "Sarhaw" (Sarzhav) ; "Saoson" (Saoson) ...

Ha bremañ penaos e vo graet evit lakaat ar brezhoneg da vont war-raok an departamant ? En tu-hont d'an aser-mañ eo ret kavout penaos e vo tu da lakaat penna-dreuzioù an departamant da adkreñv gant ar brezhonekaat. Anat daoc'h o deus kavet amañ un digarez brav evit chom hep ober tra ebet ken... Labour kevredigezhioù sevenadurel an departamant, harpet gant ar Greizenn Enklask war an Anvioù-lec'h hag ar Panelloù-henchañ, a vo klask diazezoù labour nevez frouezhusoc'h gant pennoù an departamant, a zo ar gallow ganto, ha sklaeraat da vat an traoù e-mesk brezhonegerien oberiant ha drougoberiant ar vro.

Al labour a vez graet er mare-mañ evit brezhonekaat ar panelloù-henchañ n'eo ket un divar-amzer dinnoz ha dibouez. Kenurzh ha kenskoazell a zo ret. Kreññ a ran-me ouzhpenn e c'hellont mont gant kendoujañs ha kenistim. Kendalc'homp da stourm, kendalc'homp da labourat unanet ha gant kenurzh ha gwelet a raimp brezhoneg e pep lec'h war vord an hentioù a-raok pell.

Per AL LEZ
Levriennadur : "Ar gwall piv emañ distar ar gwenedeg da vont lakaet ?" Al Liamm, niv. 259.



KRISTENION BREIZH

Kamp Katekiz e Rostren (6-11 a viz Eost 90)

Berzh en deus graet an eil gamp-mañ, ur bam ... 29 a vugale o deus kemeret perzh ennañ, eus 7 da 13 bloaz, o font eus Breizh a-bezh, an div dorerenn skoliataer e skolioù DIWAN, ha tost d'an hanter e Skol Diwan Kemper.

Rannet e oa bet ar vugale e 5 strollad, hervez o oad hag o barrezegzh war anaoudegezh ar faiz. Brezhonegerien ampart e oant holl, pe a-vihanik, pe desket ganto er skol. N'eus bet kudenñ c'hrevus ebet eta gant implij ar yezh hevlene. Ret e vo kenderc'hel e-giz se.

Un nebeut kentelioù da dennañ eus an eil gamp-mañ :

1° Un ezhomm a zo eus seurt kampoù. Kreskiñ a ra niver ar vugale (50% a gresk hevlene). En em glevet omp dija gant Oaled Diwan evit deizadour ar c'hamp er bloavezh da zont ; eus al Lun 5 d'ar Sadorn 10 a viz Eost 91.

2° Ret eo degemer brezhonegerien ampart hepken. Ar re ne gomzont ket ar yezh ingal-tre er ger a vez ret pouezañ warno un tamm evit brezhonegañ. Live yezh ar vugale n'eo ket fall dre vras, mel darn anezho a zo ganto ur pouezh-mouezh direizh a-walc'h ha dreist-holl kemmadiurioù eus ar skrijsañ. Peadra da reiñ un taol-infarktuz din...

3° Ret eo kaout binvioù modern. Sikouret omp bet gant ar magnetskop. Gallet hon eus tremen kasegigoù video e brezhoneg (Yakari, Barzhaz Breizh) ha kaout peoc'h un tamm ... Ret e vefe avat kaout kasegigoù video all, ha liessour.

Emvod miz Here

Devezh-emgav e Rostren, e skol kentañ derez an Itron Varia, 1 straed Metz, d'ar Sul 14 a viz Here.

Sp' am eus e vo kalz a familhoù en devezh-emgav-se. Komzet e vo eus ar gelaouenn emeur e-sell da sevel evit ar vugale hag ar gerent.

Ur bed all oc'h adkavout Breizh

1. Kevredelouriezh

"Galvet omp bet gant mouezh ar Ouenn, gant mouezh an Hendaod, da stourm evit Breizh, ha yezh, ha sevenadur.

Diwallomp diouzh ar stourmomp all keit ha ma c'hellomp, ha stourmomp evit Breizh "bepred" a skrive Roparz HEMON, an den a diefe bezañ doujet outañ, ur mailh, ma 'z eus unan ... un den meur !

Ya ! na pet gwech, koulskoude, en ur glevout ar c'haeleier, en ur sellout ouz ar skinwel, en ul lenn ar c'hazelennoù, na pet gwech em eus soñjet, gant ar chudennoù a beb seurt a red dre ar bed a-bezh, gant ar gorneg amañ-ahont, ar brezel e bro-mañ-vro ha traoù an euzhusañ a kuzmamp pep 'korn' eus ar vuill-douar ... ha tro-war-dre an aergelc'h ... na pet gwech em eus soñjet : drauzusañ ar mare-mañ ?

Ur bobl e-touesk ar re all eo hon hini, kement anezho bet aet da get dija abae ar marsevezh nevezvaenel... Kudannoù a beb seurt a zo, hon hini, evitañ da vazañ don ha gwir, daoust d'ar gwir bezañ ganimp, hon hini mesket, steuziel e-touez ar re all ...

Broadelour, brogarour, emrenaler, kevredeler ? Gerioù ... gerioù a-leiz hor genou e-kerz bodadegoù, emgavioù, kuzulioù ... gerioù nemetken ??? Evit bezañ moredet keit ha ma 'z aio ar bed war e bouzigig gavet an islonk pe davet ar baradoc' ??? Gerioù ... preder ... hag ober ... ma 'z eus tu, met n'eus ket kalz.

Marteze ! Ar gerioù n'int ket holl toull evelato, traoù a zo war o lerc'h, ha traoù pouazhus, traoù nevez-flamm pe kozh-Neo.

Gerioù, gwirioù, traoù gwirion. Frankiz evit kement den, kement pobl a zo, evit hon hini da gentañ-penn. Frankiz Vreizh ! An hent nemetañ evit bezañ holl a-gevred : kevredelouriezh ha kevredelezh. Setu, seun-tre hag oberiant eo ar gerioù-se. Penaos ? Pegouiz ? Amañ emañ an dalch.

Gwir eo, meur a gudenn a weler o tiwan e lec'h-mañ-lec'h, a denn eus frankiz hinennel an dud pe eus frankiz a-stroll ar pobloù. An darn vianañ anezho zoken. Un diskoulim hinennel : ar Frankiz ... un diskoulim a-stroll : ar Gevredelezh a die bezañ kavet ... ha labour a chom d'ober ken tizhout ar pal.

Bezañ broadelour hep bezañ kevredelour, klask e frankiz evitañ e-unan hep gwelout pelloùch ... N'HELL KET BEZAñ e-maez ar brezel pe, d'an nebeutañ, e-maez ar spered brezelour ; hini ar stadoù a-vremañ, hini Europa an 12 Stad (pe muioc'h) n'hell ket dont da vat ... spered ar C'hallaoued eo, ar re o deus finet, kasel da benn ha staliat an dro-spered "broadelour"-se, egheñt ar Hittier, Mussolini, Franco pe Stalin. Un hent a gas d'ar c'houennelouriezh, d'an dravadennelezh (an div c'hoar). En abeg da se, e weler furlikmed a bep seurt hag a bep liv strewet dre an trede-bed a-bezh, adalek Su-Amerika, dre Afrika ha betek Arabia ... zoken ar re a fell dezho troc'hañ ar gornenn etrezho hag ar c'hornoù gant sikour Marks pe hini ar Relijion ... zoken ar re-se ill. Aet eo kuit, sañset, an Europeiz pell diouzh ar broioù-mañ, pas o levezon, o archtan, o armoù, o c'hanwerzh, o armerzh, o armerouriezh ... o harzoù dinatur draist-holl hag o zro-spered, kea ! Ur c'hleñvad-ted, m'heñ lar daoc'h, Evito ivez ha dreist-holl n'eus nemet un diskoulim : ar Gevredelouriezh !

Hag evit Europa ? (Da vez lennet kendalc'h'het) Yann DUCHET

Psiko-Pathologiezh

Abae un nebeut amzer e c'heller lenn war ar c'hazelennoù ez eus savet tousemachez etre ur meuriad amerikan anvet ar "Mohawk'iz" ha Kebekiz ar C'h'anada. Ar re-mañ a venn ledemaat un dachenn golf war goust bared ar re-se. Taol "Carpentras", koulskoude. Dan ne sav e vouezh. N'emañ ket mui ae Charles Gaoleg evit breugeudiñ : "Vive dieu kebekilbreu ..."



Un tammig izeloc'h war ar gartenn e kaver gouennouriezh holl-vrudet gant ar c'hallaoued, Stadoù-Unanet Amerika. Lakaomp. Koulskoude n'eo ket didalvez labour ur sell evit gwelout pelec'h emañ lec'hiet ar stadoù gouennour-se. Er c'hreisteiz 'maint. Daoust ha ne oa ket war-seun ar C'hallaoued a oa o karg eus ar broioù-se ken ma voent plantet er-maez gant ar re all ?

En Afrika bremañ ez eo e-barzh ar broioù ma ra c'hoazh war o zro "kenobaraerien" c'hall e kaver an uhelañ leur a vugale o vervel.

Roger MILLA a zo c'hoarier foubal er c'hwec'hkogn. Duan a getañ, n'eus ket. Klenn a ra e vez graet c'hoazh gant Afrikaned evel pa vijent sklavet !

Ur c'hleñvad eo bezañ Gall, o vazañ ma vez lonket ganto 5 gwech muloc'h a louzeler "sedarus" eget an dud ar Stadoù-Unanet. Ha koulskoude, dre lann O.T. e ya mat pep tra. War dachenn ar bsikiatriez e reer gant ar ger "psikotek" evit komz eus ar re a zo klavñ hag gouzout dezho. Ar re all avat, a oar int klavñ e vez graet "nevrotok" anezho. Ur vro bzigotek eo daoust da vazañ bro-C'hall d'am all m'eo bet yac'h biskoazh. Ar minorelezhioù a vije kentoc'h war du an nevrotagezh dre ma ouzont e c'helle bezañ gwelloc'h ar vuhaz evito. Ne gonzañ ket eus an hinennoù hogen eus ha emzalc'hoù kevredigezhel dre vras, ha n'on ket mah Doue. Stourm ar far ouz an difrom a teu da vazañ erizezh, ar gwalgaserien ouz an drougiezh-ki !

ROUE MAROKKO



Bouev Marokko

Ne zeulo ket ar roue Hassan II da Bariz da lidañ Gouelioù Sevenadurel Marokko, en diskar-amzer-mañ, abalamour d'al levr nevez-embannet gant Gallimard "notre ami le Roi", skrivet gant Gilles Perrault, oberour brudet "le pull-over Rouge".

Hag en mignon da bolitikourien c'hall eus an tu dehou koulz hag an tu kleiz, n'eo ket evit gouzañv e vefe lavaret ar wirionez diwar e benn mestr-jahiner, a lak an urzh da ren en e vro dre ar spont.

Nebeut anavezet eo darempredoù Frañs ha Marokko. Ha gouzout a rit en doa koustet d'ar C'hallaoued 37 000 a dud lazhet aloubidigezh ar vro (33 000 en Aljeria eus 1954-1962). E 1926 eme ar skrivagner, dindan kirri-nij an arme c'hall, ur "Gernika" ar sizhun. E 1955 e teu en-dro ar sultan harluet Mohammed d'ur vro oc'h adkavout ha frankiz pa ziviz bro-C'hall paouez da stourm ouz an emsavadeg ha lakaat o nerzh da virout an Aljeria enni 3 milion a C'hallaoued.

E vab Hassan a labouro da ziskar ar stourmerien a c'hallfe bezañ e enebourien. Iriennou ijinet, prozeziou ragaozet, jahinerzh mizioù-pad, kantvedoù a vloavezhioù toull-bach, fuzuilhadegoù... ha trugarekadennou ar bolitikourien c'hall d'o mignon feal a oar ivez nouschoarzhin d'an Amerikaned ha d'an Israeliz, pimpatron ar "Shah", chañsusoc'h egetañ avat.

Servijet eo bet gant e zaou vevel Oufkir ha Dlimi, jahinerien enoret, e ve bet muntret gantañ, betegout. Ha bugale

Oufkir, bac'het abaoe 1972, 3 bloaz ar yaouankañ da neuza, kiriek da vezañ ganet diwar un tad muntret. Ha karc'harioù Hassan, re bar da gampoù Hitler, ma n'eo ket gwashoc'h; dalc'het en noz-du, mouchet an daoulagad diouz rei, hag ar vloavezhioù o tremen. "Hassan, heol ar vuhez", evel a c'hallfe larout Maurice Druon, sekretour meur akademiezh bro-C'hall, meulganer Ceaucescu an Atlas.

Gouzout degemer ar bolitikourien hag ar gazetennerien estren a oar ober an Actrou Hassan. Ha setu perak ne vez ket kaoz eus ifern prizonidi bolitikel Marokko en ho kazetennou, tudou, nag eus Abraham Serfaty, koshañ prizoniad politikel Afrika abaoe dieubidigezh Mandela. A-dreñv mogerioù Tazmamart, piv int 'ta ?

"Un tamm muioc'h eget rached, un tamm nebeutoc'h eget tud" hervez gerioù unan tec'het alese.

"Barr an eurvad, eme Hassan, a zo sellobet bep mintin er melezour, pa laman ma barv, ha soñjal n'on ket ur "pemoch brein".

Gweltaz Keramboun

SINA

"An holl ac'hanomp a oar e oa aet an armerzh hag ar bro-renezezh e Sina atrezek an adreizhadurioù abaoe distro Deng Xiaoping war al leurenn bolitikel e 1978. Diwar neuze e rene skipailh an adreizherien diwar goust radikaled ar Strollad c'hortoz e c'houlz. Deng Xiaoping : penn-bras ar vroad; Hu Yaobang : penn ar Strollad ha Zhao Ziyang : Ministr kentañ.

Met an adreizhadurioù zo chomet war ar sec'h abalamour da gudennou isframman ha da amsentidigezh lod burevidi. A-benn neuze o deus klemmet studierien ha micherieren evit lakaat tizh d'an adreizhadurioù hag evit adreizhañ ar bro-renezezh ivez. Reuz a save un tammig e pep-lec'h : ar c'houlz a oa deuet evit ar radikaled : Yang Shangkun a zeus da vout Prezidant ar Republik, Wang Zhen, is-prezidant... padal e oa lakaet er-maez "Hu ar gwrineloù". Kreviñ a chome skipailh an adreizherien koulskoude ken ma varvas Hu d'ar 15vet a viz Ebrel 1989. Setu e teuas ar stourm etre an daou strollad da vout kriz : Zhao Ziyang,



daofin neuze Deng, skoret gant ul lod eus ar bobl diouz un tu hag ar radikaled Li Peng, Yang Shangkun ha burevidi ar Strollad diouz an tu all. Da vare manifestadoù ar studierien e voe an eil re ar re greñvañ ha Deng-pouez an oad warnañ pe gwidre al louarn - rankas heuliañ, o c'hortoz...

Er miz-mañ eo bet gwelet en-dro Zhao (o c'hoari golf) evit ar wezh-kentañ abaoe miz Even ha skinet eo bet war ar skinwell. Ragarouez distro an adreizherien ?

Da lavaret eo er ret d'ar gomunourien reizhkelenn sioulataz m'o deus c'hoant e teufe embregerezhioù estren en-dro ha... sportidi d'an Xlivet C'hoarioù Aziaat a vo adal an 22 a viz Gwengolo e Beijing".

Met Li Peng ha Jiang Zemin a chom mistri war ar vro, hag ar ger-stur a zo : urzh, unvaniezh ar bobloù, ha kealoù Marx ha Mao.

Yann-Varch THOREL

TURKIA

TIBET

Ministr-kentañ ar gouarnamant sinaat Li Peng en doa sinet e miz Ebrel ur gouarnamant evit ma ne vefe ket al lezenn-vrezel o ren ken war Lasa, kêrbenn Tibet.

"Dre m'eo deuet stabil stad kêr Lasa en-dro ha dre m'ema an urzh o ren, eo bet aledus al Lezenn-Vrezel" eme ar gouarnamant. "Kuzul an Aferioù Stad en deus divizet ne vefe ket al lezenn-vrezel o ren adal ar 1añ a viz Mae 90". O ren e oa al lezenn-se abaoe an 8 a viz Meurzh 1989 a c'houde taolioù-freuz kaset a-benn gant "un nebeud disrannerien" en un doare "grevus". Setu ar pezh a lenner war ar gazetenn "Keleier Beijing".

"Abaoe disklariadur al Lezenn-vrezel eo aet armerzh ar ranvro kalz war-raok, diost-holl evit gennad al labour-douar dre m'eo bet aostet 530 000 tonennad greun. Oberiadur graantel ar ranvro zo bet kresket a 6,4% betek 220 milion a yuan (46 milion dollar S.U.) e 1989. A-drugarez d'an disoc'h-se en deus kresket kengread ar c'henwerzh enporzhiañ hag exporzhañ a 39%, dindan 12 miz, betek 30 milion dollar S.U. ariene. Hag a-hed ar program a strizher e veze kendalc'het al labour war c'hanterioù ar sevel hag an isframman gant argant ar Stad-Kreiz ha Proviñsoù all. Troet ez eus bet 7,3 milion dollar S.U. digant ar Stad evit kompenn Palez ar Potala. Live-bevañ Tibetiz zo bet kresket ha levedoù ar gouarnen ha re ar vesarieren o deus tizhet 397 yuan dre zen (da lavaret eo 84 dollar S.U.). Muioc'h eget 40 mirdi, sinemaoù, boestoù noz, zo bet digoret e kêr mui un tregont dielt bennak".

Pa soñjer ez eus bet miret kement a wellaat e-pad bloavezhioù gant "un nebeut disrannerien" ken...

Yann-Varch THOREL diar Keleier Beijing 7vet a viz Mae 90

E miz Meurzh e oa bet lac'het 450 Tibetad e Lasa ar-lorch un taol-dispac'h a oa bet loc'het aratozh gant poliserion sinaat gwisket gant dilhadou disoudard. (s.o. niverenn miz Eost "The Observer")



TURKED ARAOK 1974

Peadra zo da souezhin o welout lod broioù evel Bro Irak, broioù n'int ket betek-hen e-touesk ar re a zoug kalz doujañs d'ar gwir etrevroadel. Emeur e barr ar pilpouzerezh en afrika-se, re anat eo. Panevet an soul-maen ne vije ket bet ken feuket pennoù bras ar bed gant diskenn soudarded Saddam Hussein war treazhennou diventi pleg-mor teus war menezier ar gured. Ne voe ket ken taer difennerien gwir ar bobloù pa voe aloubet Kiprenez an Norz gant al lu turk. Koulskoude e oa peadra neuze da lavarout o legemant da sultaned nevez Ankara.

Gresian a sevenadur abaoe donedigezh an akeaned en XIIIvet kantved arak hor salver, e teuas trade enezenn ar Mor Kreizdouarel da vezañ ul lodenn eus an impaleriezh ottoman e 1571. Tizhet gant dilun ar broadoù e tarsavas pobl Kiprenez a-enep an ottomaniz e 1821. Goulenn a rae an emsaverien an Enosis, da lavaret eo bezañ staget ouzh Bro C'hres. Ur c'hwitadenn e voe. En eskemm eus skor ar Vreizhveuriz a-benn talin ouzh emledigezh an impaleriezh rusian, e fuzias an durned, tonkad Kiprenez er Rouantelezh-Unanet e 1878. O vezañ ma oa turk a-orin, 18% eus poblañs ar vro, ne gollas ket Ankara fiziañs da astenn he c'hrabanou warni. E-doug ar bloavezhioù hanter-kant e stourmas

kalet ar vroadelourien c'hresian evit an Enosis. E 1958 e tarzhas argadoù etre div genel ar vro. E 1959 e teuas Kiprenez da vezañ ur republik distag pa save Ankara a-enep an Enosis. Brudet gant Ankara, e krogas an emsaverien duik en o armoù e 1963 a-benn stourm a-enep ar republik nevez. E 1964 e laoskas kirri-nij Ankara bombezennoù war aodoù Kiprenez. Nepell war-lec'h e tilestras an tokarnou glas a-benn lakaat termen d'ar brezel diabarzh. E 1974 e ambannas broadelourien c'hresian, an Enosis. Ne chomas ket Ankara difliv. Douarñ a reas ul lu a daou ugent mil a soudarded turk. Tri devezh-pad e vrezelidig garv dre ar vro. Lazhet e voe ouzhpenn pevar mil a-dud e-pad an emgannou. Daou c'hanter mil a repudi a rankas tac'hout kuit diouz an tolead aloubet gant strolladoù Ankara, un tolead a oa 40% eus an enezenn, ennañ 70% eus he finvidigezhioù. E 1983 e voe krouet Republik Turk Kiprenez an Norz. Ur stad n'eus nemet Ankara ouz he daremprediñ ez diplomatik. Hiziv an deiz ez eus tregont mil a soudarded turk o tiwall an trebinnoù nevez. Deut eo hanter kant mil a drevadennerien eus Bro Anatolia d'ober o annez en tolead aloubet.

Gant an hevelep emzoug e Kiprenez, e teu anat d'an holl n'eo ket ar gwir etrevroadel emañ Ankara o lifenn an afer Bro Gowel. Mechal hag emañ ar varc'hata he skor gant pennoù bras ar bed ?

Paol ar MEUR

na zisoñjit ket !

Miz HERE STAJ

Emañ ar CCSC (Komite evit Kenaozañ ar Servij Nannsoudard) o kinnig d'ar c'hevredigezhioù ur staj evit deskin degemer objektourien, e Roazon, d'ar 26 a viz Here, eus 9e30 diouzh ar mintin da 5e diouzh an abardaez.

Studiet e vo : istor ar servij nannsoudard, al lezennoù hag an dekredoù a zo o ren ar servij e Stad-C'hall, an darempredoù etre an objektour hag izili ar gevredigezh, hag ivez etre ar

gevredigezh hag ar ministrerezh e-karg, hag ivez pezh a c'hall ur gevredigezh gount en ur zegemerout un objektour.

Priz ar staj : 300 lur evit ar c'hevredigezhioù n'int ket ezel eus ar CCSC, 200 lur evit ar re ezel, ha netra evit ar c'hevredigezhioù a genlabour gant ar CCSC.

Enskrivadurioù ha titouroù digant CCSC, 16 rue Jean Giono, 91000 EVRY.

LID

Gouel Per DENEZ e Skol-Veur Roazonn 2

Emañ **Per DENEZ** o paouez mont war e leve diwar e garg a gelenner hag a rener ar **Gevrenn Geltiek e Skol-Veur Breizh-Uhel**.


E-pad ouzhpenn ugent vloaz en deus staget **Per DENEZ** e anv ouzh buhez ar **Gevrenn Geltiek**. Lakaet en deus houmañ da zont da vezañ ur wir gevrenn gant un toullad brav a studierien. Digoret eo bet ar studioù keltiek war ar bed hag en ezhommou a-velañ ha gounezet ez eus bet ar stummadur skol-veur en o yezh evit ar Vretoned gant an **DEUS** hag an actreegezh vrezhoneg.

Kelennerien ar **Gevrenn Geltiek** hag un toullad mignoned da **Per DENEZ** e rannou all ar **Skol-Veur** o deus graet o soñj, eta, aozañ ur gouel a enor.

Graet e vo er skol-veur d'ar **Merc'her 24 a viz Here**, adalek 4e30 diouzh an abardaez.

Pedet eo ar re a zo bet studierien gant **Per DENEZ**, e vignoned kozh ha yaouank, da gemer perzh. Ar garterien hag ar sonerien a vo degemeret mat ivez.

Ur prof a vo roet da **Per DENEZ** an deiz-se. Kement hini en deus c'hoant da ginnig ur skodennig a c'hall e chas da sekretourva ar **Gevrenn Geltiek** en ur verkañ war ar golo "Gouel Per DENEZ".



DOUARNENEZ

D'ar Sadorn 27 ha d'ar Sul 28, e Douarnenez, avel bodadeg veur ar **FLAREP** (Kevredad ar yezhoù-rannvro en deskadurezh-stad), aozet gant an **APEEB** (Kevredigezh ar familhoù evit kelenn ar brezhoneg).

STRASSBURG

Eus ar Yaou 15 d'ar Sadorn 17, e Strassburg, kendiviz e Kuzul Europa a zivout "Gwirioù ar yezhoù, gwirioù an dud", aozet gant ar **C'helech Rene Shickela**, 31 Oberlinstrasse, 67000 STRASSBURG, Pg. 88 36 48 30.

Miz DU

KARAEZ

D'an 2-3-4 a viz Du 90 e Karaez, Gouel al Levrioù e Breizh, aozet gant **EGIN** (Kreizenn Sevenadurel) gant skoazell **Skol Uhel ar Vro** ha **Kevredigezh Embannerien Vreizh**. Pg. 98 93 37 43.

NAONED

E Naoned, d'ar 15, 16 ha 17 a viz Du, **Kandiviz Tudoniezh e Skol Veur** al lizhiri (pg. 40 74 74 01) diwar-benn "**Horreblezhioù Sevenadurel ha Diorreerezh Armerzhel**", aozet gant **Skol Uhel ar Vro, LERSCO** Naoned gant kenlabour ar greizenn tudoniezh c'hall eus Paris hag ar greizenn enklask breizhek ha keltiek (**CRBC**) eus Brest.

GOUEL PER DENEZ Kevrenn Geltiek

Skol Veur Roazonn 2

6 Bali G. Berger

35043
ROAZHON SEDEKS

FESTIVAL SINEMA DOUARNENEZ

UI lañs nevez evit an 13vet bloavezh.

Eus an ijin betek ar skeudennoù filmet dre guzh, o tremen dre sell an Amerikaned war an Arabed, trizekvet **GOUEL SINEMA DOUARNENEZ** a blede er bloaz-mañ gant **POBL PALESTINA**.

Daoust d'ar fed ma vez dalc'het bremañ un tamm abretoc'h ar festival, ez eus bet gwelaet kalz tud o kemer perzh en devezhoù-mañ. Gwir eo e c'hoarveze, dres d'ar mare-se, darvoudoù grevus ar **Golfe**, hag e oa **POBL PALESTINA**,

danvez filmoù ar festival, e kreiz jeu ar c'helaouin...

Filmoù e-leizh savet gant **Michel KHLEIFI** (eus Galile), realizatourien Ejipt, Siri, hag all... a oa eveljust met ivez divizoù gant **Palestiniz, Israeliz** war gudenenn "stad" (en holl sterioù) **Palestiniz**.

Ur staj 2 zevazh evit donaat anaoudegezh Breizhiz war istor, stourm **Pobl Palestina** a oa kinniget da berzhidi ar festival. Graet en deus kalz a verzh ar staj-mañ hag hervez an dud e oa "abadenn 90" unan eus ar re wellañ.


Devezh Breizh ha Broujoù ar Selled-ha- Kleved

Ar filmoù breizhek a zo bet diskouezet d'ar yaou ha d'ar Gwener, ha reuz a zo bet un tamm gant lod eus ar filmaozerien, digitet ma oant ne vefe ket bet dalc'het o film evit kanskrivañ evit ar **Priz**. (Divizet ez eus bet, evit ar wech kentañ, dibab a-ouez ar filmoù resevat ar re a oa "dellezek" da vezañ diskouezet avel "Filmoù Breizh").

Ar Gwener-pad neuze ez eo bet dalc'het e Douarnenez Broujoù Penn ar Bed ar Selled ha Kleved e-lech ma zo bet gwelaet tost da 200 den o kemer perzh. Tud dilennet, tud a-vicher (skinwel, sinema, salioù, festivalioù), stourmerien.

Ur wech ouzhpenn en deus klasket **FR3** kaout arc'hant gant **Kuzul Penn** ar Bed evit an abadennoù brezhonek. Siwazh an disorc'h a lak an traoù da vont war gill : bez e vo bemdez un abadenn 5mn a geleier e Brezhoneg... mat kaer ! met skignet e vo da 12e06... ha d'an eur-se 'm eus aon e vez c'hoazh an dud ar parkerier, pe war an hent evit al lodenn vrasañ eus an dud a zistro da zebrñ buan-ha-buan er gar, hag eveljust vo lamet kuit an "TAOL LAGAD" magazin keleier ar Sadorn abardaez, a oa lodenn gwellañ abadennoù brezhoneg **FR3**, ha lakaet en e lech' abadenn **CHADENN AR VRO**, a veze kinniget d'ar Sul goude kreistaiz... Un dra all c'hoazh : emañ **FR3 PARIZ** o paouez lemel kuit an abadenn **Alzasianeg** 20 mn a oa bemdez en Elzass !

Elena RIOU



INTIFADA

Un diskouezadeg luc'hskeudennoù "INTIFADA" war stourm ar vein en douaroù dalc'het gant **ISRAEL** a oa bet staliet e Douarnenez.

"KANTIK AR VEIN" ar film savet gant **M. KHLEIFI**, a zo bet ranket diskouez un trede gwec'h d'ar Sul noz, a c'hallfe bezañ bet anvet "Intifada" pa vez gweliet

ennañ merched, paotred ha bugale o c'hoari kanetennoù gant tennoù fuzuilh... ken mennet int da adkavout o bro ha da stourm betek an trech, gant mein diouzh ret.

Pelloch eget stourm ar vein, hag a vez diskouezet a-wechoù war hon skrammoù bihan, ez eus bet tu da welout penaos eo aozet tud **Palestina** daoust da mougadur ha jahinerzh **Israel**, ha peseurt spi a zo ganto evit an dazont.

Lennit al liamm

Koumanant bloaz 150 lur

(studierien, soudarded ha tud dilabour : 100 lur)

Skrivañ da : **AL LIAMM**
16, stradaed Fours à
Chaux - 35400-St Malo-

Levrioù nevez

PRIZ LANGLEIZ 90

Gant an oberenn "Un aod ... ur galon" eo aet ar maout er bloaz-mañ. Ha d'ar Gwener 14 a viz Gwengolo e ti an DRAE e Roazhon, eo bet roet da Franseza KERVENDAL priz Langleiz dirak un nebeut skrivagnerien, embannerien ha mignoned d'ar skrivagnerezh.

Ne oa ket posubl da Vefa de BELLAING dont d'al lid setu m'eo bet kefridiel Ronan HUON (skrivagner ha embanner) d'ober ur brezegenn a-zegemer. Kinniget eo bet ar priz da Franseza KERVENDAL gant an Itron LANGLEIZ.



KELC'H DIWAR GELC'H
gant Kristian Brisson,
embannet gant Hor Yezh

"Silapl a reas e vaen-diwan e dour ar spi, neuze e savas kelc'h diwar gelc'h..." Trede kelc'h an tonkadur, war-larc'h "Ar Peder-mor" ha "Skeud", eo al lev-mañ. Un trede emgav gant lennerien 'zo.

Evit ar vugale vihan :
"THICO, KIKO UN INDIANIG FUR"
embannet gant Skol
Vreizh - an 3 askolenn.

Skeudennoù vras e liv, un istor piljus, 32 pajennad, 50 lur gant mizou-kas.

Ur gontadenn savet gant J.P. Idatte, troet gant Kamilh Ollivier ha JC Ruyet.

GWELTAZ AN INIZI
gant Mikael Madeg
embannet gant Brud-Nevez

Da vare al laeron-vor, an Normaned, e c'hoarvez an istor-mañ. Ur c'hrennard trizek vloaz ez eo Gweltaz. E baeron manach a zo deuet d'e weliat en enezenn m'emañ o chom enni. Ha prederiet eo spered Gweltaz. Piv eo e dad ? Peseurt yezh a oa e hini ? Perak eo deuet da Venniged da vevañ gant e vamm-gozh hag e vamm, trelatet ha spered ganti ? Evit gouzout e vo mat deoc'h lenn levri nevez Mikael Madeg.

ROPARZ HEMON
embannet gant
Dalc'homp Soñj
(e galleg)

Buhez an den, ar skrivagner hag ar stourmer, skrivet gant Bretoned o deus anavezet, labouret, ha stourmet gantañ, Vefa de Bellaing, Y. Bouessel du Bourg, Henri Gaouissin, Per Denez, Yann Gwegen, Alan Heusaff, Ronan Huon, Pierre Laurent, Ivona Martin, Aimee Nemo, Erwan Tymen.

GERIADUR AN ANOUIO
LOENED MOR
gant Alan Gwennog-Berr,
embannet gant Brud-Nevez-Emgleo Breiz

Ur geriadur brezhoneg-galleg lec'h ma vo kavet e-leiz anvioù ar pesked-mor, pesked-dour dous, al loened-mor, al laboused-mor.

AZILIZ ENVOR AN TAN
gant Roger Richard
embannet gant Brud-Nevez

"Bev-mat eo ar glaou-bev e-barzh botez Aziliz. Gant Roger Richard eo bet aztommet hon erivor. Nomp ket prest da vervel gant ar yenijenn..." G.K.

BARZONEG AN ENEZENN HAG AN HOLEN
gant Gerard Le Gouic,
lakaet e brezhoneg gant Naig Rozmor
embannet gant Brud-Nevez

STRED PAOTRED AR ZABAT
gant Visant 'n Askol

"Edivrennoù skol Paotr-Jeg abaoe ar skol-vihan betek ar vachelouriezh. Darvoudoù gwirion c'hoarvezet er bloavezhioù '30 gant ur peizantig beuzet en ur c'helc'hiadur Kevredigezhel disheñvel deus e hini" embannet gant Brud-Nevez-Emglev Breiz.

SIZHUNVEZH KEVREDIGEZHIOU BREIZHEK BRO ROAZHON



Ti Tachenn Veurzh, deus ar 15 d'an 20 a viz Here
Diskouezadegoù
diwar-benn ar Brezhoneg, ar sonerezh, an dañsoù, lazou-kanañ, ar gouren.

D'ar Yaou 18 da 8e30 noz,
Abadenn Veur
gant ouzhpenn 150 den,
8 Kelc'h Keltiek, 2 bagad,
ha sonerien, kamerien
ha Konterien Bro Roazhon.

15-20 a viz Here 90
Kenaozet gant an UPRACB-OSCR-CIJB

Ouzhpenn 30 kevredigezh savnadurel a ya d'ober an **UPRACB** (Unvaniezh Kevredigezhioù Breizhek Bro Roazhon), skolioù Brezhoneg, sonerezh, Kelc'hioù Keltiek, Bagadoù, Gouren, embannerien ... **DIWAN**, Skol An Emsav, Kuzul ar Brezhoneg, APEEB, La Boueze, Bretagne Gallèse, Kalaouenn, Dastum, U.G.B., USV Dazont h.a. ...

Kinnig a reont ur sizhunvezh kelaouiñ ha dud d'ar Roazhoniz evit ar bloavezh 90-91.

UPRACB
30 leurenn al Lisou
35000 ROAZHON
99 30 06 87

D'ar
Sadorn 20 adalek 2e30 g.k.
Form ar c'hevredigezhioù
(staliou,
degemer ha kelaouiñ,
staliou levrioù,
ha filmoù video).

Da 9 eur noz, e sal ar Site,
FEST NOZ
gant Kamerien ha Sonerien ar Vro
ha leurenn digor,
kan ha diskan hag all.

BREMAN NIVERENN 109
MIZ HERE 1990
11vet bloavezh

Lizhiri.....	2
Postañ arc'hant.....	3
Gwarioù ar vugale.....	4
Divyezhegzh.....	5
Breujou Europa.....	6
Reter Komunour.....	7
FR3 Breizh.....	8
Stourm ar Brezhoneg.....	9
Hent ar Meurvein.....	10
Touellerezh.....	11
Kristenion Breizh.....	12
Preder.....	13
Roue Marokko.....	14
Sina-Tibet-Turkia.....	15
Deiziataer.....	16
Gouel ar Sinema.....	17
Levrioù nevez.....	18
Gouel e Roazhon.....	19
Kendiviz Douarnenez.....	20

Ar pennadoù gant Tangi Manac'h, Herve ar Gall, APEEB Tangi Louarn, Paol ar Meur Divi ar Gag, Lena Louarn, SAB, Per al Lez, Yann Talbot, Yann Duchet, Jil Boucherit, L.K., Gweltaz Kerambun, Y. Varc'h Thorel, Elena Riou, Noela Olier.

Ar maketenn gant Nolwenn Louarn, Jean Michel Roynard Lena Louarn.

Al luc'hskeudennoù gant J. M. Roynard, K. Duigou, SUAV Lena Louarn.


An tresadennoù gant Malo Louarn -

Embannet e ti moulerezh OSCR Roazhon 99.30.16.41.

Renerez Bremañ Lena Louarn

KOUMANANT BLOAZ 150 lur
Skoazell adalek 200 lur
Estren-Stad : 200 Lur gall

SKRIVIT E-BARZH BREMAN !
Deuit da vezañ kenskriver da Vremañ : kasit ho pennadoù a-raok an 22/10/90





Douarnenez 27-28 A VIZ HERE 90

B.P. 6 - 29172 DOUARNENEZ Cedex -
98 92 28 10

div yezh er skol

4vet KENDIVIZ
A-ZIVOUT KELENNADUREZH
AR YEZHOU-RANNVRO
ER SKOLIOU PUBLIK



D'AR SUL 28 A VIZ HERE

Azalek 9 eur betek 11 eur : BODADOU LABOUR

1 - STUMMAN MISTRI-SKOL

Ha posubl e vo krouiñ un I.U.F.M. (ar skol normal nevez) a stummo skolaerien divyezhek ?

Kemennoù gant U.G.B. (Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg), an A.P.L.E.C. (Kevredigezh evit kelennadurezh ar c'hatalaneg), ar F.E.L.C.O. (Kengevredigezh evit kelennadurezh yezh ha sevenadur Okitania).

2 - AR YEZHOU-RANNVRO, AL LEVRIOU SKIANTOU HAG AL LEVRIOU KELENN

Gant astenn an divyezhegezh er skol, e kresk an ezhomm da vodernaat ar yezhoù.

Prezegenoù gant J.-Y. LAGADEG, diwar ar geriadur hollvrezhonek, L. ER GOAT, diwar ar geriaouiñ e brezhoneg, gant O. CIHIGOYENETCHE, diwar ar c'helenn en euskareg en eil derez.

3 - EMDROADUR AR GEVREDIGEZH, EMDROADUR AR SKOL

Peseurt darempredoù etre kemmoù ar gevredigezh, implij ar yezhoù hag ar goulenn evit reiñ dezho o flas er skolioù ?

Kemennoù gant L. LAURENT, diwar implij ar brezhoneg, J.-J. PROST, war skolioù an divyezhegezh e Katalonia an hanternoz, gant B. TAHHAN, diwar ar vroad hag al liesyezhegezh : an arabeg e Frañs.

4 - AR YEZHOU-RANNVRO HAG AR GWIR

Gant unvaniezh Europa 1992, daoust hag-eñ e vo ur c'hemm bennak e lezennoù hag e reoliadur Bro-Frañs e keñver he yezhoù ?

Prezegenn gant J.-M. WOHLING, gwiraour, a-zivout barnadennoù e Bro-Frañs ha gant D. O'RIAGAN war dachenn Europa.

Azalek 11 eur betek 13 eur : ER SAL VRAS :

- un diverradur gant pep bodad-labour
- ur c'hlozadur gant ar F.L.A.R.E.P.

E-pad an daou zevezh e vo diwallet ar vugale ha kinniget c'hoarioù dezho.



D'AR SADORN 27 A VIZ HERE

ABADENN VUZIK

HA FEST-NOZ

Aozet gant DOUARNENEZ DIVYEZH

KREISTEIZ KENDAEL KELAQUIN GANT AR
F.L.A.R.E.P.

ER SAL VRAS :

14 EUR A BEP SEURT KEMENNOÙ DIWAR-
BENN KELENNADUREZH AR
YEZHOU-RANNVRO E BRO-FRAÑS
HAG EN EUROPA GANT :

- an Ao. FUSINA, diwar ar stad a-vremañ e Korsika
- an Ao. MORGAN, diwar ar skolioù e Bro-Gembre
- an Ao. STRANJ, war ar skolioù slovenek en Italia
- an Itr. SIKMA, a-zivout bro-Fris en Izel Vroioù
- an Ao. BOLGUER, diwar ar gouezeleg

16 EUR 30 FILMOU VIDEO :

« Divyezhezh er vro, divyezhezh er skol »,
gant Claude HAGEGE, yezhoniour
kelenner er c'h/Collège de France

« Eus ar skol trema ar vuhez, an
divyezhegezh e Bro Euskadi »

17 EUR Diviz etre ar c'hevredigezhioù kerent
hag an dilennidi diwar an divyezhe-
gezh er vro hag er skol, ha stum-
madur ar skolaerien

Da gemer perzh en diviz-se ez eus
bet kouviet kargidi eus an Deska-
durezh-Stad.